

Gwerz ar Pantekost

awenet diàr don : "Ur priñs yaouank"

kempennet get Roje Abalan ha Daniel Carré

O dait - C'hwi, Spe - red - San - tel,
Ha de - gas - sit ag an neañv
Bann ho kou - loù peur - ba - del.

O dait-C'hwi, Spered Santel,
Ha degasit ag an neañv
Bann ho kouloù peurbadel.

Hep ho kelloud doueel,
Netra e kalon mab-den,
Netra a vez didamall.

Dait, o Tad ar baourerion,
Dait, mammenn pep donezon
Dait, sklaerder hor c'halonoù.

Gwalc'hit pezh 'zo kousiet;
Glebiit pezh 'zo disec'het,
Gwellait pezh a zo gouliet.

C'hwi, hor C'hoñfortour dibar,
Ostiziad dous an ene,
Freskoni, douster hep par.

Distennit pezh a zo reut,
Tommit pezh a zo yen-sklas,
Eunait pezh a zo gweet.

'Kreiz al labour, an diskuizh,
En tommder, klouarizion flour,
Er glac'har, konfort ha peoc'h.

Gratait d'ar re 'deus ar feiz,
Hag 'n em daol en ho kalon,
Ho seizh donezon santel.

C'hwi, ar gouloù eürus,
Dait, leuniit bet ar sol
Kalonoù ho fideled.

Dakorit merit, vertuz,
Roit salvedigezh diwezhañ,
Roit levez peurbadus. Amen.